

# Staliañ Kuzul Sevenadurel Breizh

Sadorn 4 a viz Gouere 2009, hantergelc'h ar C'huzul-rannvro e Courcy

Keneiled ker,  
Aotrou dileuriad ar KASR,  
Itronezed hag aotrounez,  
Mignoned ker,

Gant ma c'heneiled em eus kalz a blijadur o tegemer ac'hanoc'h hiziv en hantergelc'h Kuzul-rannvro Breizh, da-geñver ar mare pouezus-mañ a lakafen a-walc'h da bazenn bennañ evit kadarnaat sevenadur hor Breizh. Donemat a lavaran deoc'h holl ha trugarez evit bezañ asantet dont da gemer perzh en ensav nevez-se.

E 1977, ez embanne Prezidant ar Republik, Valéry Giscard d'Estaing, e vefe sinet ur garta sevenadurel da-geñver ur brezegenn distaget e Ploermael ma veze anavezet a-benn ar fin al liezegezh sevenadurel gant ar Stad, « *deuet eo ar poent* » a lavaras « *da embann n'eus ket da enebiñ ar fed bezañ gall da vat hag ar fed da genderc'hel da vevañ diouzh hengounioù, henvoazioù hag ur sevenadur rannvroel pe lec'hel. Unanded Frañs n'he deus tamm ezhomm ebet da vougañ pe da bladañ liezegezh naturel hor broad... C'hwi, Bretoned a bep oad, eus ar vro c'hallou hag eus ar vro vrezhonek, pinvidikaet e vez ganeoc'h, dre ar pezh zo dibar deoc'h, buhez ar vroad ha broudet e tleit bezañ d'en ober* »...

Respont a rae ar brezegenn-se da startijenn sevenadurel Breizh a oa bet o tispakañ er bloavezhioù 60, harpet ouzh dibradadur armerzhel hor Rannvro ha kaset pelloc'h gant goulennoù a denne d'ar yezh. Arouez an neveziñ e voe.

An neveziñ-se, an azgenel sevenadurel-se zo bet enkorfet dre addizoleiñ hon diazezoù e-keñver sonerezh, Istor, dañsoù, lennegezh ha yezhoù hogen ivez dre ur c'hrouiñ, un digeriñ, un neveziñ o vleuniañ kejet gant douar bev sevenadurioù all, ar pezh a roas d'hor rannvro un nerzh hag ur brud anavezet gant an holl.

Bloaz war-lerc'h e voe sinet ar garta sevenadurel e 1978, bloaz-ha-tregont zo bremañ. Reiñ a reas an tu da ziazezañ tri benveg e servij palioù uhel nevez evit ar sevenadur e Breizh : ur C'huzul sevenadurel, lakaet da gefridi dezhañ « *bodañ an obererien a gas ar muiañ sevenadur Breizh war-raok* », un ajañs teknikel deuet da vezañ diwezhatoc'h, ajañs sevenadurel Breizh, hag un ensavadur sevenadurel, Skol-Uhel ar Vro (hag a vo krouet da vat e 1981), aozadur « *gouestlet da studioù, da enklaskoù ha da sevenidigezhioù* »

Gant an tri benveg-se, pep hini en e blas hag en e gefridi, ez eus bet kemeret ur perzh hollbouezus evit kas identelezh Breizh war-raok ; brudet eo bet ganto pinvidigezh ha startijenn un identelezh dibar a c'haller muzuliañ hiziv an deiz ar perzh a gemeront e dedennusted hor rannvro.

Ouzhpenn 30 vloaz war-lerc'h emañ ar binvioù-se da emdreiñ. E dibenn ar bloavezhioù 1990 dija e oa bet lakaet sklaer an ezhomm emdreiñ evit respont da skodoù nevez, da zaeoù nevez gant krouidigezh Ofis ar Brezhoneg. Meur a wech em eus bet tro da lavaret e berr gomzoù ne oa na Kenrouedad na Kuzul-rannvro e 1978 ! Ur c'hammed nevez a oa ret ober.

A-hend-all, kenemglev an Unesco diwar-benn al liesseurted sevenadurel bet degemeret e 2006 zo bet ur bazenn a-bouez war-raok. E-touez palioù ar c'henemglev e kaver « *kas war-raok an doujañs da liesseurted an eztaoladurioù sevenadurel hag ar bezañ emskiantek eus he zalvoudegezh er par lec'hel, broadel hag etrebroadel* » hag « *anavezout natur dibar an oberoù, madoù ha servijoù sevenadurel evel treuzkaserioù identelezh, talvoudoù ha ster* ».

Evit a sell ouzh ar C’huzul-rannvro, degemeret e oa bet gantañ a-unvouezh e Kerzu 2004 ur steuñv politikerezh yezh evit kas ar brezhoneg hag ar sevenadur galloù war-raok. Evel ma oa bet gouestlet ober, ar bilañs a rent kont eus sevenidigezh ar politikerezh yezh-se a vez graet bep bloaz gant un ali roet gant ar bodad kemmesk ennañ, peurgetket, dileuridi eus Kuzul sevenadurel Breizh ha gant skoazell deknikel Ofis ar Brezhoneg. Aet eo ar bilañs-se d’ober un danevell zo bet kinniget da-geñver dalc’h diwezhañ miz Mezheven.

El lusk nevez-se eo ez eus deuet c’hoant d’ar Rannvro krouiñ ar C’huzul sevenadurel Breizh nevez-se. N’eus skouer ebet all a seurt-se e Frañs ar c’hevandir, ar rannvro gantañ omp o krouiñ hag o staliañ ur c’huzul a-ratozh, 70 ezel ennañ ha dezhañ pep frankiz hag emrenerezh da reiñ alioù, ober kinnigoù, sevel studiadennoù ha dre vras da bleidiñ gant kement tra zo war dachenn e varregezh.

Ur chañs evit hor Rannvro eo al lusk nevez-se, an avantur nevez-se evit identelezh Breizh.

Evel ma skrive Michel Denis en « Dictionnaire du Patrimoine Breton », ar « vreizhadelezh » zo bet dezhi tri stumm en o c’hreñv pep hini d’e dro, o kenvevañ da brantadoù zo e mareoù hag e lec’hioù disheñvel : *“d’an identelezh nac’het en he c’hreñv er penn kentañ e vo enebet evel ur respont un identelezh stourm, a-raok na zeufe war wel en un doare sederoc’h, un identelezh krouiñ, na c’hell bezañ dianavezet gant den ebet hiziv an deiz”*.

N’emaomp ket mui d’ar mare ma ranke ar Vretoned stourm evit saveteiñ o identelezh. Dibarelezh Breizh, ar pezh zo bet anvet gant lod “skouer Breizh”, a laka da vont a-gevret war ul ledenez, startijenn ur sevenadur, modernelezh un diorren deuet evit ul lodenn vras diwar intrudu tud ar vro ha kenskoazell. Sellet e vez outi bremañ evel ouzh un elfenn araokaat. Deomp-ni da lakaat bleuniañ an hêrezh-se hag he rannañ zoken gant rannvroioù all dezho ar memes c’hoantoù e Frañs hag en Europa.

Dre azneveziñ binvioù ar garta evel dre grouidigezh un DFKS Ofis publik ar brezhoneg, pe c’hoazh dre an embregadenn hon eus bet c’hoant reiñ lusk dezhi nevez zo o tennañ d’an arnodiñ evit kelenn hor yezhoù, ez omp mennet da greñvaat hor perzh er c’hrouiñ hag hor youl stroll...

Hon identelezh, hor santad bezañ eus ar vro-mañ – na c’haller ket distagañ diouzh yezh ha sevenadur Breizh – zo un atoud hep e bar evit ar c’halite bevañ hag evit diorren Breizh war un dro. Mennet omp da greñvaat ar «c’hoant-se da vezañ asambles », ar « c’hoant-se a Vreizh » ha d’e dreuzkas d’ar rummadoù yaouank.

Chom hep nac’hañ morse piv omp hag ober ur fulenn ziabarzh eus an dra-se, hag aotreit ac’hanon, pa ne c’hall ket bezañ ganeomp hiziv, da lenn un arroud eus levr an itron Mona Ozouf «Composition française» : *«e pep hini ac’hanomp [e gwirionez], ez eus un den hag a gred start e kened an talvoudoù hollvedel, holet gant ar mennozh kevatalded ha spi ur bed boutin zo enno, hogen ivez un den liammet gant e istor, e vemor hag e hengoun dezhañ e-unan. Ret eo deomp bevañ, well-wazh, etre an hollvedelezh hunvreet-se hag an dibarderioù gwirion-se.»*

Setu e berr gomzoù ar pezh, a soñj din, a zle hon heñchañ asambles, ar monedone-se etre an hollvedel hag al lec’hel, etre hor gwrizioù hag hor c’hoant da gaout ur Vreizh digor ha brokus.

A-benn nebeut e lakain hon dalc’h staliañ da chom a-sav evit dilenn prezidant kentañ Kuzul sevenadurel Breizh, doare nevez, met a-raok an ehan-se e karfen reiñ deoc’h un nebeud mennozhioù, un nebeud hetoù, evit labourioù kentañ ar C’huzul sevenadurel.

En lavaret em eus bepred p’hon eus bet tro d’en em gavout asambles, gortoz a ran diganeoc’h bezañ war evezh dibaouez war hor politikerezhioù publik, bezit hor gedourien en ur mod evit an danvezioù a sell ouzhoc’h, hag en eskemm e c’houlennimp kalz diganeomp-ni hon-unan. Gortoz a reomp ivez diganeoc’h bezañ barrek da ginnig ha da grouiñ avat.

N'eo ket an danvezioù a vank met, hep gortoz pelloc'h, e kinnigan deoc'h prederiañ, ispisial, war beder dodenn, pevar dae. Karout a rafen e gwirionez e vefe an ensav nevez-mañ ul lec'h da reiñ lusk ; ober a rin anv anezho hep bezañ lakaet unan anezho da bouezusoc'h :

- an hini gentañ zo ober eus Breizh ar rannvro gentañ dezhi ur gwir venveg niverel gouestlet da vat da zanvez Breizh. Reiñ an tu da bep hini ac'hanomp da c'hallout ober e vad eus an teñzor dispar zo eus sevenadur Breizh en e liesseurted brasañ posupl. Gouzout a ran ez eus traoù a vez graet, labourioù war dachenn ar glad dizanvezel. Gallet em boa reiñ ma soñj war an danvez-se nevez zo dirak an obererien bodet e Roazhon diwar atiz Dastum. Hon atebegezh stroll eo, a soñj din, n'eo ket hepken mirout hogen ivez skignañ douar bev hor sevenadur.

- An eil danvez a zlefe da'm meno bezañ breutaet warnañ e labourioù ar C'huzul a zo ur preder war binvioù karta 1977 ; en lavaret em eus deoc'h bremaik, bet savet en ur c'henarroud dibar, ma ne oa ket eus ar Rannvro er stumm a anavezomp hiziv an deiz. Karout a rafen e rafec'h kinnigoù emdreiñ, adaozañ, kenlodenniñ. Digor eo ar chanter, hep raksoñj, en ur soñjal ivez e lakaat an IRPAB da emdreiñ.

- An trede chanter, an trede dae, zo hini an annezidi nevez e Breizh. Evel ma ouezet ez eus eus Breizh unan eus ar rannvroioù a zedenn ar muiañ a dud, lakaet eo anat gant he foblañs. 25 000 annezad nevez a c'hounezomp bep bloaz, ar pezh zo kevatal d'ur gêr evel Lannarstêr. Ur chañs eo, diskouez a ra hor startijenn, met bez' e c'hall bezañ ur skoilh ivez ma ne vestroniomp ket trawalc'h an egor, ar c'hempouezioù. En tu-hont d'ar c'hrefen a denn da derkañ an tiriad hon eus ivez da brederiañ war meur a dra, en o zouez an hini ret-holl zo eus treuzkas identelezh Breizh e kement doare zo. Penaos degemer mat ha krouiñ eskemmoù a genbinvidikaio ac'hanomp. Aze c'hoazh e ouzon ez eus bet roet an tu gant oberoù speredek da aozañ an degemer-se en un doare mat evit an holl.

- Hag ar pevare danvez a-benn ar fin, kement ha klozañ. Penaos lakaat hon identelezh, a laka meur a hini da gaout avi ouzhimp, da vezañ ur benveg da ziorren hon armerzh. Ul labour war an etrebroadelaat zo d'ober. Anat eo deomp, pa vez kavet muioc'h-mui abeg er bedelaat, e c'hallfe bezañ stag ouzh talvoudoù a genskoazell hag ar santad bezañ eus ar memes bro bezañ un atoud. Rannvroioù all o deus komprenet ervat kement-se. Ur vro ma c'han intrudu hag ur c'hoant da c'houzout sevel un dazont boutin ez eo Breizh. Klaskomp en diskouez asambles.

Evel ma welit ez eus kalz a chanterioù digor. Evit skoazellañ ac'hanoc'h hag evel ma'm boa gouestlet ober e taolo evezh ar C'huzul-rannvro e vefe peadra ganeoc'h e-keñver lec'h labour ha koskor. Goulennet em eus digant Pennrener ar servijoù mont e darempred buan-tre gant ar prezidant emac'h o vont da zilenn a-benn ur pennadig evit ma vo roet an aveerezh hag araezioù labour evit Kuzul sevenadurel Breizh.

Hep gortoz pelloc'h, hag a-raok ma vefe goulennet piv zo war ar renk, e fell din ho trugarekaat da vezañ selaouet ac'hanon gant ar spi e vo ar Sadorn-se, 4 a viz Gouere, deroù un avantur nevez evit Breizh, ur mennozh nevez a hetomp holl. Breizh kreñv gant hec'h identelezh, bev, digor ha krouerez. Talvoudoù zo boutin deomp-holl ez eo.

**Jean-Yves an Drian**

Prezidant Kuzul-rannvro Breizh